




Gant an, nevez amzer emañ Breiz o vleunia.

Bleun-Brug

Niv. 80 (Miziek-Mensuel)

EBREL 1955

Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

TAOLIT EVEZ MAT

Evit kement a sell ouz ar c'houmanañchou, adkoumanañchou, chench adres e vo ret skriva ha kas an are'hant da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Arabab d'eoc'h kredi e c'hell « Bleun-Brug » beva gant aer an amzer. An em c'houlennit eta ha paet eo ganeoc'h ho koumant. Ma n'eo ket kasit raktal dre ar post, d'an adres a welit uheloc'h (hep lakaat ano all ebet nemet : **BLEUN-BRUG**) :

Koumanant ordinal	500 lur.
Koumanant a enor	600 lur.
Koumanant madoberour	1.000 lur.

AR SKRIDOU a zo da gas evel araok, da :

M. l'Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

AR SKODENNOU IZILI ha kement a sell ouz ar skol dre lizer a zo da veza kaset da :

V. SEITÉ, Bleun-Brug, Châteaulin (Finistère). — **C.C.P. 544.22 Nantes.**

SKOAZELLER : 200 LUR — EZEL : 500 LUR — MADOBROUR : 1.000 LUR.

EUR C'HELOU MAT !

Buhez an aotrou Yann-Vari Perrot

Person Scignac, rener Feiz ha Breiz ha

Tad ar Bleun-Brug,

Skrivet gant an aotrou Poisson, beleg

eus Roazon, a zo dindan ar wask.

N'eus ket eul lenner da « Bleun-Brug »,

N'eus ket eur Breizad,

N'eus ket eur beleg

ha ne garfe lenn ar vuhez-se.

Bez' e c'heller rakprena al levr azalek bremañ. N'eus ken d'ober nemet kas an ano d'an oberour : abbé Poisson, 22, rue Saint-Louis, Rennes.

DEVEZ AR BREZONEG

D'an 19 a viz Mae, deiz gouel sant Erwan, emañ devez bras ar brezoneg, er Finister, er Morbihan, en Ille-et-Vilaine hag el Loire-Inférieure, ha d'an 22 er C'h.-du-Nord. Goulenn a reomp digant mignoned ar Bleun-Brug beza brokus en deiz-se, rei skoazell d'ar gesterien pe mont o unan da gestal. Evit hor yez eo.

TAOLENN

Eus Lizer a Bastor an Ao. 'n Eskob : p. 1. — Pardon St Erwan, gant J. Priel : 2. — Arzur, duk Breiz, ha Richemont, gant Konholarn : Maner Keryann, gant L. Lok : p. 6. — An Ao. Perrot hag ar B. B. : p. 8. — B. B. 1905 ha Kañv : p. 9. — Ar vrec'h hag ar vaksin, gant an Dr Tréleire : p. 10. — Tonell Miguel, gant ar B. Dominik : p. 11. — E ser c'hoari, gant V. F. : p. 12. — Korn al lizeri : p. 14. — Keleier : p. 15. — Roll Bleun-Brug Kallag ha Madoberourien ar B. B. : p. 17.



133692

Eus lizer a bastor an ao 'n Eskob Fauvel

Evit chom beo dirak al lavariou-faos a glevomp e-kreiz diêzamañchou ar vuhez, ar feiz he deus ezomm da veza sklerijennet...

Evit chom beo c'hoaz, ar feiz he deus ezomm da vont doun en ene. Ar gelennadurez kristen roet d'an den ez vihanik, n'eo ket tra-walc'h evit ober d'ezañ derc'hel d'e gredennoù, eur wech deuet da veza bras. Eun deskadurez kristen bouedekoc'h a vez roet er gador-brezeg, bep sul, da geñver ar retrejou ha misionou, hag ive e bodadegoù an Aksion Katolik. Dougen a raio frouez, hervez ma vezoc'h, n'eo ket hepken aketus da zelaou, met soursius ouspenn da reizha ho puhez war ar pezh a vez lavaret d'eoc'h. An had kouezet war eun dachenn veinok a deu da zec'ha. Ne zeu da rei kant evit unan nemet an had taolet en douar kempennet mat. Ne vezoc'h ket, c'houi, eus an dud fidel-se, hag a zelaou komzou Doue gant eur skouarn dibreder, a zell muioc'h ouz berrentez ar zarmoun eget ouz ar gelennadurez a zo ebarz.

Ha ne c'hellfec'h ket, va Breudeur, poagna hoc'h unan da greski ho teskadurez kristen? Bez ez eus gwazed hag a lenn bemdez eur bajenn eus an Aviel. E meur a diegez, goude ar bedenn diouz an noz, e talc'her c'hoaz da lenn Buhez Hor Zalver Jezuz-Krist, pe Buhez ar Zent. Bep bloaz, eun niver, re vihan, siouaz, a wazed hag a werc'hed a oar kemeret war o labour eun nebeut deizioù evit mont d'ar retred hag evit pleustri eno war gwirionezioù ar feiz ha war stad o ene. O-unan, int souezet o welet pegen talvoudus ha pegen frouezus eo an dervezioù-se evito. Ha n'eus ket aze, ken alies a zoareoù evit maga ho puhez kristen hag ober d'ezi bleunia kaeroc'h?

Ar feiz kristen, evit chom beo, he deus ezomm da veza maget. Gouzout a rit, va Breudeur, ouz peseurt taol ec'h en em vag. Ar gwel ac'ha-noc'h, en iliz-mañ, a zo eun testeni eo urziet mat ho puhez kristen ; met va lezit, eur wech muioc'h, da ober ouzoc'h eur goulenn : ha poagna a rit-hu a-walc'h da glevet an oferenn gant devosion? Gwelet a rit pegement a youl o deus ho peleien d'ho sikour da heulia gwelloc'h ar Zakrifis santel : pourchu 'reont warnoc'h d'en em voda an tosta ma c'helloc'h d'an aoter, da respont d'ar pedennou, da gemeret perz er c'han, da gaout etre ho taouarn ho leor oferenn, da veza holl asamblez, en iliz, eur feiz, eur galon. Pliet gant Doue ne rafec'h ket skouarn vouzar d'ar pezh a c'houlennont diganeoc'h.

En eur laoskaat he lezennoù e keñver ar yun araok komunia, en eur rei aotre a-wechou da lavaret an oferenn diouz an noz, menoz hor Mamm zantel an Iliz eo aesaat d'he bugale seveni d'ar brasa eus o deverioù kristen : mont d'an oferenn ha komunia. Arabat d'eoc'h beza souezet dirak ar chenchamañchou-se. O veza ma kav ho puhez kristen gwasoc'h dañjerioù, he deus brasoc'h ezomm ive da veza kreñv. An Iliz, evel eur vamm vat, a deu d'en em ober diouz diêzamañchou an amzer-vremañ, evit ho kennerzi suroc'h a-ze.

† ANDRE, Eskob Kemper ha Leon.

Pardon Sant Erwan e Landreger

50 vloas a zo

gant Jarl Priel.

Piou bennak n'en deus ket gwelet ar gouel-se hanter kant vloaz 'zo n'en deus ket gwelet netra a gement e talvefe ar boan ober meneg dioutañ. Gwir eo, en em voda a ra hirie en-dro d'ar sant eun torkad barnerien, alvokaded ha kelennerien, met daoust d'o brud ha d'o deskamant, petra eo an Aotronez-se e-keñver an tolpadou tud, an engroez diniver, ar mor a bardonerien gwechall ? « *Laudator temporis acti* », a gred deoc'h ? A c'hellfe beza, met daoust ha gouzout a rit an draig-mañ : pell 'zo, n'eus na bedell na chasgeu en iliz-veur Landreger a rank gopraat bep bloaz hini Priel !!

Gwechall, pa oan war va studi er skolaj, d'an naontek a viz Mae e tirede holl barrezioù ar c'horn-bro, ha ne gomzan ket eus eun dornad saverien o fri e sell d'arvesti ouz ar prosesion war lein eur c'hleuz en eur vandrouilhat gwestell hag avalou-oranjez, met eus ar parrezioù a-bez o kana ken ma fin-daone war lerc'h person ha kure, hag er penn-araok ar chasgeu, ar c'hroazioù lugernus gant kleier munut e-pign outo, eun drapell a bep seurt liou o fraoñ-val a-us da bep bugel, hag eveljust eur bern bannielou : darn, ar re skañv awalc'h, douget gant plac'hed yaouank, eur gatiolenn war o fenn hag en gwenn-erc'h penn-da-benn, ha d'o heul eun druilh krennardezed, gwisket ganto dilhad o fask kenta ; bannielou all, seiz pe vouldou, gant gwragez Breuriez ar Rozer, eun toullad mat anezo hag ivez en gwenn, ha d'an diwez ar bannielou bras, kaeroc'h an eil eget egile, ha pounner, va Doue, pe bounneroc'h.

Hini sant Jozeb, eus Priel, ruz-tan hag aour, ken teo ha ken hir an troad anezañ ha gwern eur gobar, a oa lorc'h ar barrez. Ne veze ket pedet da boanial en-dro dezañ nemet ramzed, c'houec'h pe seiz d'an nebeuta, ha daoust da se bec'h o deveze a-wechou gant o samm. Adal ma save eur barr avel, rankout a rae daou pe dri sach a laz-korf war bep kordenn ar banniel e-keit ma lamme ar re all da vriata an douger ; anez-se, skubet e vije bet an holl vagad, sant Jozeb hag all, a-ziwar an hent betek an douflez. Ha Plougouskantiz, daoust ha ne veze ket stad enno d'an naontek a viz Mae gant relegou o fatrom sant Koneri ha re e vamm Eliboubana ? Chapel ar santez-mañ a oa e Loaven, eun enezennig e-traoñ ster Landreger, ha deiz he gouel mont a rae eur prosesion war vag da gas Koneri daveti : « Evelkent, eme ar re goz, ret mat eo d'ar sant papur dont eur wech an amzer da welout penaos emañ ar bed gant e vamm. »

*« N'eus ket en Argoat, nag ivez'n Arvor,
Koulz ha sant Erwan, 'vit an dud a vor... »*

Dre se, douget e veze d'ar Vinihi eur bern bigi a bep seurt stumm ha ment, ar re vihana war ziouskoaz moused yaouank en gwenn, hag al listri bras gant pesketerien a-vicher, pep a dog eoliet war o c'hokenn hag en-dro dezo an dilhad da vont d'an aod. Eur bloavezh, e welis e Landreger strollad eur ouele-tenn, eus Sant-Malo m'am eus soñj.

P'edo ar re-mañ dindan eur c'hast amzer nepell eus an Douar-Nevez ha war nes koll o buhez, setu ma rejont o gêr da vont a-gevret da Gervarzin, gant ma plijfe da sant Erwan o leuskel da c'hounit o zamm bara.

Dour a vere eus meur a lagad o sellout ouz ar vartoloded-se, diare'henn, o roched war var o bragou, eur pikol goulou koar en o dorn hag en o c'her-c'henn eur pennad kordenn, evel torfedourien o kerzout d'ar groug, hag i o kana, e galleg eveljust :

*« Saint Yves, notre Père,
Toi que nous implorons... »*

Ha tud, va Salver, nag a dud !... A-wechou e tigoueze da Gamlez, ar barrez e penn-kenta ar prosesion erruout en kêr war he giz, peurechuet ganti he zro, kent na veze aet an eskibien e-maez an iliz-veur.

Hag ar beorien 'ta !... a bep tu d'an hent, war bennou o daoulin pe harpet ouz ar c'hleuzioù, bez' e veze regennadoù klaskerien vara paotred ha merc'hed, koz ha yaouank, dall, moñs, pe vac'hagnet, darn war flac'hioù, darn-all hep gar ebet ha kluchet en eur c'hased izel war rojou, hemañ oc'h eoni, skoet gant an droug-sant, henhont gant trousekennou ha goulou spontus, eun heug hag eur rukun sellout outo ! Ha blejal, youc'hal, garmi, beogal ha yudal a raent gwiti-bunañ, pep hini en e yez, hag a bouez-penn, ken ma veze o safar trec'h da voubou ar pedennou, diskan ar c'hantikou, soroc'h ken lies a votez o voustra poutl'r ha mein an hent bras, da n'eus forz all, ha zoken da vimbalañ ar c'hleier o vralla.

Evit va c'helou, fromet e vezen dreist-holl gant an « inosanted » pikolou kanfarded diare'henn ha diskabell, lart ha kreñv da welout, a-wechou gant baro hir ha louet, darn hanter-noaz, darn-all gant eur sae vastaret en-dro dezo evel hini eur c'hrouadur nevez grog da gerzout.

Aon am beze zoken rak an urupailhou-se na baouezent ket da vabouzi, da skrignal pe da zifroñkal, ha d'ober buhez d'o laou en eur gamma o genou gwasoc'h eget marmoused.

Ken stank ha grizilh e koueze war ar c'hlaenn dirak ar beorien santimou ha gweneien, ha d'ar c'heulz-se, kristenien, e vire c'hoaz eur gweneg a netra e holl dalvoudegez. Da serr-noz, hervez gleven, e rae meur a foeter-bro eun tammig sac'had, met war a gredan, nag an Aotrou Doue, na sant Erwan ven-niget ne selle re verr, an naontek a viz Mae, ouz levenez druezus an dud keiz-se...

**Tennet eus al levr dudius, saourus, beo ha yac'h,
savet gant Jarl Priel ar skrevanier tregeriad :**

VA ZAMMIG BUHEZ.

**Prenit al levr-se. N'ho pezo ket a geuz. 595 lur +
30 lur mizou kas.**

**P. Bodenan, 3, rue des Potiers, Ergué-Armel-Quim-
per.**



E skeud tour bras Sant Jermen

gant Yeun ar Gow

Emañ al leor-se dindan ar wask hag, a-benn hanter miz mê a zeu, e vo peurlouet ha kaset d'ar rakprenerien.

Chom a ra c'hoaz eun nebeud skouerennou diberc'henn hag alia a reer ar re a zo e soñj kaout al leor d'e c'houlenn digant an oberour.

Siouaz ! koustus-bras eo ar moula hag, evit mirout ouz koll, e tleo beza gwerzet, mizou-post hag all, 750 lur ar pez war baper komun ha 1.000 lur war baper brao.

Priz ar rakprenadenn a vo da gas da : Yves Le Goff, Gouézec (Finistère), kont-post 12668-Roazon. Pedi a reer ar re o deus rakprenet da bêa diwarvremañ.

Ha rakprenet hoc'h eus al levr-mañ ? Ma n'oc'h eus ket, skrivit raktal.

Arzur III, Duc Breiz hag Aotrou Richmond

(1393-1457-1458)

War-lerc'h maro Per II^{vet}, tron Breiz a dlüe dont d'ar Priñs Arzur a Vreiz, contr da Ber II^{vet} ha breur da Yann V^{vet} hag Aotrou Richmond. Arzur, trede eus an ano, a oa bet betek neuze Konnetabl e Bro-C'hall, da lavarout eo penn-rener armeou ar roue. Dindan galloud eur seurt brezelour, unan eus ar re vrudeta d'an ampoent, hon tadou-koz o doa gwir abeg da veza dienkreiz. Luzie-toe'h oa koulskoude an traou egët ma seblantent beza. Evit her c'hompren, e rankomp distrei eun tammig war an amzer dremenet.

An Dug Yann V^{vet}, e penn kenta e amzer-ren, a oa ret d'ezañ gouzout en em zibaba etre diou rouantelezh war gresk : Bro-C'hall ha Bro-Saoz... Bro-Saoz, d'an ampoent, a seblante beza an tu kreñv ganti. Ret e voa d'ezañ eta harpa Bro-C'hall. E vreur Arzur a oa aet dija di da vrezeklekaat ouz ar Saozon, pa gasas d'e dro eun arme a zek mil Breizad ha harpa ar c'hallaoued (1415). Met Arzur ne c'hellas ket mirout ouz ar stourmad da gregi e-kichen *Azincourt*. An arme breizad a voe re ziwezat, an trec'h a oa aet gant ar Saozon. Arzur a oa chomet war an dachenn, ha ken buan all ne vije ket bet anavezet ken gwatalet ha ma 'z oa.

Gloazet n'oa ken, a-drugare-Doue. Daou vloaz warnugent oa d'an ampoent. Savet oa bet e lez Dug ar Bourgogn ha mignon bras e teuas da veza d'an *Fulub-Vat*, unan eus priñsed c'halloudusa an Europ d'ar mare-se, Breur-kaer zoken e voe d'ezañ diwezataoc'h, dre zimezi gant e c'hoar Marc'harid.

War-lerc'h taol *Azincourt*, Arzur Richmond a chomo seiz vloaz prizoniad gant ar Saozon. Trei a raio ganto war-lerc'h e vreur Yann V^{vet}, er bloaz 1419. Met re c'halloudus en-holl e teue Bro-Saoz da veza. Dre se, pa voe goulennet ar Priñs Arzur da vont da Gonnetabl Bro-C'hall, an Dug Yann V^{vet} ne ziferas ket. Met Arzur ne c'hellas kemer ar c'hleze a ginniged d'ezañ, nemet gant asant *Stadou-Breiz*. Ne voe ket digemeret gwall vat gant ar pennadureziou a oa endro da Charles VII^{vet}. Disfiziañs a oa anezañ hag e zoareou rok ha didroidell ne blijent ket kalz d'ar bilpouzed-se.

An hini deut ar gwella gant ar roue, La Trémoille, a zeuas a-benn, zoken da lakaat terri Arzur eus e garg. Hemañ, daoust da se, a chomo feal da Charles VII^{vet}. Pa voe digilhet Orléans gant *Janned Ark*, e teuas d'en em ginnig d'ezi gant e Vretoned. Hep goulenn aotre ar Roue, e roas harp d'ezi da c'hounit emgann Patay. Met pa voe kurunet ar Roue e Reims, ar paour kêz priñs a voe pedet da vont da guzat.

Er bloaz 1434, evelato, ar Roue a gomprenas ar fazi en doa graet. Rei a reas en-dro e garg da Arzur. Diwar neuze, an traou a yeas evit ar gwella gant Bro-C'hall. Arzur a lakas Dug ar Bourgogn, e vreur-kaer, da drei kein da Vro-Saoz ha d'en em glevout gant ar roue, e kêr Arras (1435). Adkemer a reas Pariz. Skuba ' reas ar Saozon diouz an Normandi gant trec'hadenn vrudet Formigny (1450). Pa bignas da Zug edo aet izel ar stal gant ar Saozon e Bro-C'hall.

Met, e-pad m'edo ar Priñs Arzur a Vreiz o tastum gloar ha galloud da roue Bro-C'hall, edo hemañ o klask trouz ouz niz e gonnetabl, an Dug Per II^{vet}, evit lakaat e graban war hon rouantelezh !

Eun dra gaer eo gwelout Arzur Richmond o servija ar roue gant fealded, evit ober d'ezañ adkavout e dron hag e zouarou, hervez spered an amzer-se. Met kerse eo en dije bet tro, dre eno, da sevel d'ar roue eun arme a-zoare, hag a lammifo, eun devez, war e vro e-unan, war hor bro-ni. Gouzout a-reomp, evit gwir, e labouras ar priñs da sevel da Charles VII^{vet} eun arme nevez, paet

ha bevet reiz, ha diarbennet pa glasse ober skraperez. Ar c'honnetabl ne zamante ket d'ober implij eus ar groug, ha gounezet en deus, en doare-se, al lesano a Gastizer.

Pevar bloaz ha tri-ugent, — koz dija — edo Arzur III^e pa gemeras ar gurunen war-lerc'h e niz. Ne roas ket, evit-se, e zilez eus ar garg a gonnetabl Bro-C'hall. Kavout a reas war he hent, kudenn al le a wazoniezh.

Eun dra vat e ve, marteze, lakaat amañ, evit lod, eun tamm sklerijenn war ar wazoniezh. En amzer an Normaned, eun aotrou re zister evit difenn e zouarou e-enep an enebour, a yae da gavout eun aotrou galloudusoc'h evit lakaat e zouarou dindan e warez (pe proteksion). En digoll a-se, e teue da veza gwaz an aotrou bras, ret d'ezañ sikour e aotrou bewech ma vije ezomm. Toui a rae e le a wazoniezh, ha pa'z ae goude-se a-enep d'e le, e aotrou en doa gwir da lemel digantañ e zouarou, dre abeg a drubarderezh.

Toui al le a wazoniezh striz a oa merka beza e dalc'h eun aotrou all, evit kement a selle ouz perc'henniez an douar hag ar servij er brezel. Met e-kichen al le a wazoniezh striz, ez oa eur wazoniezh laosk. Bez' e oa houmañ eur merk a enor hepken, roet gant eun aotrou d'eun aotrou all galloudusoc'h egetañ.

Pell a oa edo rouaned Bro-C'hall o klask lakaat duked Vreiz da doui o le a wazoniezh striz. M'o dije ar re-mañ pleget, ar rouaned o dije gounezet gwirion war zouar Breiz. Hon duked o dije ranket peurliesha plega d'ezo. Ha kenta hini n'en dije ket pleget a vije bet tamallet da veza trubard d'ar roue. Hag hemañ en dije laketa hor bro d'ober eun astenn d'e rouantelezh.

E-giz merk a anaoudegez vat e-keñver e gonnetabl deut da zug, Charles VII^{vet} a glaskas lakaat anezañ, dre heg, d'ober al le a wazoniezh striz. Met an Dug ne blegas ket, ne reas nemet merka eur wazoniezh laosk.

Ar roue ne bouezas ket muioc'h. Met er bloavezh war-lerc'h e kavas tro da heskinat an Dug. Dug Alañson, tamallet da veza trubard d'e roue a oa da veza barnet gant pennou bras ar rouantelezh. Da Arzur III^e e voe kaset ive kemenadurezh da gemer perzh er prosez. Respont a reas ne dlüe, e-giz dug, netra d'ar roue na d'ar rouantelezh, ha n'en doa na gwir na dlead da gemer perzh en aferiou Bro-C'hall.

N'oa ket echu c'hoaz. Kavet e voe an tu da lakaat Eskob Naoned, Gwilherm a Valastreg, d'en em sevel a-enep an Dug. Ne felle mui d'ezañ anaout an dug da vestr war douar e eskopti, met ar Pab hepken, pe d'an hira roue Bro-C'hall !!! Sklaer eo edo eskob Noaned en e c'haou. Na pebez tabud kasaus ha glac'harus, evit eun dug reiz ha kristen !

An dug ne welas ket an eingleo o tont. N'oa ket kalz ouspenn bloaz m'edo o ren, pa gouezas klañv, e penn kenta an Azvent 1458. Daoust d'ar poaniou en doa, ne deas ket d'e wele, ha n'ehanas ket gant e labour. Yun a reas penn-da-benn an Azvent. Mont a reas da holl ofisou Nedeleg. Antronoz, gouel sant Stefan, ez eas d'an oferenn, e komunias hag e lavaras e ofis a-bez war ben-nou e zaoulin. Da 6 eur diouz an abardaez e varve.

Maro din eus ar brezelour hag eus ar c'hristen direbech ma 'z edo bet e-doug e vuhez !

Bez' ez eus bet war an douar tud a vrezel ha tud a c'houarnamant hag o deus graet eun tamm brao brao muioc'h a drouz eget *Arzur ar C'hastizer*. Met n'eus ket bet kalz ken dispont, ken distlabez ha ken madoberus hag heñ. Siwaz ! en eur vervel, sur a-walc'h, ne gomprenne ket e pebez riskl en doa laketa e rouantelezh, gant e gleze e-unan !

Konhoiarn.



Maner Keryann

An dud a gav dezo n'eus a dudchentiled nemet ar re a zoug e galleg « de » gant o ano. Eur fazi eo. Kosa perc'henn maner Kerian a zo meneg anezañ er paperiou koz a oa OLIER e ano. E 1444, e voe zoken galvet da Baris gant ar Roue. Eno e voe c'hoarzet dezañ da veza laosket e bried war e lere'h en e vaner Keryann e parrez Sant-Nouga.

« Bro-Leon 'zo pell, 'zo gouez. Hoc'h hini goz a vezo inouet he unan, a voe lavaret d'an Olier. N'ho peus ket aon ne jomfe ket fur. » — « Va Doue, eme an Olier it da welet hoc'h unan. » Ha dao ! eur parizian da Geryann. An itron yaouank a zelaouas anezañ eun nebeut derveziou. Setu amañ eun dibuner ampart, eme hi ; war ar marvailhou da vihana : hag e voe al lakepot taolet en eun toullbac'h da zibuna stoup.

« Mistouet, eme eur parizian all, e tle beza va mignon en e vleud e Keryann keit all e chom eno. Ha ma yafen di war zaou hanter gantañ ? » Ha dao ! da Geriann. Hemañ a oa ken dibuner a zotoniu eget e gamalad. Kaset e voe d'an toullbac'h da sikour dibuna stoup. Parizianed all a zeuas c'hoaz hag e voe graet kement all dezo... Pa zistroas Olier eus a Baris ar ganfarted o doa dibunet eun toullad mat a stoup ha zoken graet meur a vallin awalc'h da c'holoi holl, gweleou ar maner. E c'hellit kredi n'o doa ket kement a foug, ar bari-zianed, o vont endro d'ar gear evit m'o doa da zont da Gerian.

Eur verc'h en doa an Olier. Dimezi a reas gant an aotrou Barbier wardro ar bloaz 1500. Ouenn ar Barbiered a oa eus a vro Bondi. E bro-Leon edont deut da jom daou c'hant vloaz a yoa gant ar Rohaned, e 1363, deut da veza perc'henn madou Konted Leon.

Yan Barbier, mab, pried Janed Parcevaux, deut da veza intañv, a zimezas gant Janed Kersauzon. E vreur Hamon eo a c'hoanteas lakât sevel eur maner nevez, an hini a zo c'hoaz en e zav, e lec'h m'eo bet ganet ar Bleun-Brug hanter kant vloaz a zo. O sellet ouz Keryann unan eus manerioù braoa a zo e Breiz hag e Bro C'hall, e soñjer eo bet koustet ouspenn daou wemneg e sevel.

N'eo ket arc'hant eo a ree diouer da Hamon Barbier, daoust dezañ da veza den a iliz. Ken hir ha litanioù eo roll e enorioù gant leve founus, avât stag outo. Person Gwinevez, Sant-Nouga, Guicourvest, Guicar, Sizun, Guimiliau, Plouzane, Plouviat, Guipavas, Plabennec, Lannilis, Plouneour-Trez, Plourin-Leon, Plourin-Treger, Plomeur, brasa ha pinvidika parrezioù ar vro eta ha n'ouzon ket eus petra all, prioldioù, chapalanioù.

Ouspenn-ze Hamon Barbier a oa chaloni bras iliz-veur Kastell-Paol, kuzulier Parlamant Breiz, abad bras Lok-Maze-Penn-ar-Bed, hag an dra-mañ hag an dra-hont gant ma talvezent daou c'hant lur ar bloaz.

Kement ha kement a barrezioù hag a leveou iliz a oa perc'hennet gantañ pa deuas da vervel ma c'houlennas ar Pab Jul III petra a oa c'hoarvezet e Bro-Leon gant ar veleien ma varvas kement anezo er memez dervez.

Souezetoc'h e vije bet m'en dije gouezet petra ouspenn a jome warlerc'h an aotrou Hamon Barbier tremenet e Kastell-Paol e miz Du 1544. Paperioù a ziskoueze en doa prestet arc'hant bras da galz a dud ; bez e oa eur c'hased leun a beziou aour hag arc'hant ha braoigou talvoudus kenañ digaset eus broioù estrenn gant martoloded ar vro ha listri ha dilhad eus ar re gaera ha liñserioù ha me oar me.

Etouez al levrioù ne oa, a gredan, hini brezonek ebet. En o zouez e oa pape-riou a leve a vern.

Evit difenn kement se a binvidigezioù ouz al laeron hag ouz an dud a vrezel Hamon Barbier a zoñjas sevel eur maner hag a vije bet ive eur c'hastell **kreñv**.

N'ouzer ket piou a ijinat tresadennoù Keryann. Eur maout e oa war ar vicher. N'eur ket souezet e voe laket tregont vloaz d'e beurchui : (1558-1595).

Loeiz Barbier, niz hag heritour Hamon, a varvas prestik goude achu al labour. Ar maner a zo c'hwec'h dervez arat ec'honder dindanañ. O veza m'edo unan eus manerioù kaera e rouantelez, ar roue Loeiz XIII a zavas Keryann da varkizaz. An enor-ze gant ar gwirioù stag outañ ne viras ket ouz stal Keryann da vont da stalig gant René Barbier ha Franseza Parcevaux, e bried.

E'uroc'h e voe mab Coatañscour pa deuas eus a Blourin-Treger da vab kaer da Geryann e 1689. Markizez Coatañscour a zimezas gant aotrou Kersauzon e 1760. Evit difenn gwirioù e vro dirag stadou Breiz n'eus ket bet dreist d'an aotrou-mañ. E hini goz a oa madelezes. Se ne viras ket ouz pôtrede ar Revolution da zont da Geryann d'ober o freuz hag ho reuz. An itron a yeas da repui da Gastell ha setu petra 'c'hoarvezas.

« Barnediguez ».

Rentet dre an tribunal revolutionner etablisset e Brest hevel au'e'h hini Paris, pehini var an disclaration eus ar jury a zoug :

1° « ez eo certain penaus abavoue mis eoust 1792 ez eus bet antretenet complojou segred ha criminal gant an adversourijen eus ar bobl a Franç quen en diabar, quen en diaveas ;

2° Penaus Anna-Mary-Francesa Coatanscour intañvez Launay de Letang ha Susanna-Augustina Coatanscour intañvez Coatanscour ez int an autored pe ar guen-doberezed ? eus an drouc-ober-se » ; condauni a ra al lavaret Coatanscour intañvez Coatanscour da boan ar maro.

Eus an nao messidor (mis an eoust)... 2 eus ar republic unan hac indivisibl, en hano ar Bobl a Franç, an tribunal en deveus rentet ar barnidiguez a heul : Guellet dre an tribunal revolucionner etablisset e Brest, an act a accusation dresset dre an accuser public en e guichen, a enep Anna-Mary-Francesa Coatanscour intañvez Launay de Letang, oaget a 65 bloas, diaraucq-amâ condès o veva eus e leve guindioq eus a K/jean communen St-Vougay, o chom e Paul-Leon,

Hac a enep Suzanna-Augustina Coatanscour intañvez Coatanscour diaraucq-amâ marquisès, oaget a 70 vloas o veva eus e leve guindioq eus a gommunen St-Vougay e K/jean hac o chomm eno, departamant a Finistère..

Tamallet e voe dezo « beza darempreded nemet ar vouën noblañ milliguet ha beza roet selear da anaout principou controll d'ar re eus ar revolution » beza bet e correspondañ gant estranjourien hag emigreet.

En eul lizer, eun nizez a skrive d'an itron de Launay... « pa deuleur un taol lagad var an amser tremenet, ne helleur quet en em ampeich da gaout queuz deza ».

Pennadoù all eus lizeri a zo moulet c'hoaz. En unan anezo e lenner oa bet diaes « dichifra al lizer divesa » n'am eus en em servichet ar vealc'h-mâ nemet eus a liou du-pot. Petra bennac ne deo quet oc'h hini en hevelp feçoun-se, euntinui a ran d'e lenn manivieq-bras, dre voyen ar musulyou a surentez pe re am boa disquezet deoc'h ».

Al liziri a deue eus a Vreiz, Londrez, Lannion, Roazon, Gersey, Rhelmshausen.

An itronezed a oa « dalc'het ebars an ty a arret, lavaret ar c'hastell e Brest » ; « bez e vezin quemeret dre gorf... ».

O madou a vezo acquisitet ha confisquet da brofid ar republik. Ar boan douguet a enep an oll drouc-oberyou se... a so ar maro..

...Ar barnidiguez-mâ... a vezo embannet ha placardet ebars ar republik en-oll d'an-oll e gallec, hac e lagaic'h brezouneq ebars en departamant a Finistère.

Peder eur varnugent warlerc'h itronezed Kerian a voe dibennet « Var placzenn triomphlou ar bobl eus a gommunen Brest ».

Sinet : RAGMEY, président.
QUEMAR, greffier.

E Brest e ty Audran imprimer eus ar représentantet.

D'ar 17 a viz Even 1794 eo e c'hoarvezas an torfed-ze. Ma vije bet gortozet d'o dibenna edont da veza laosket da vont endro d'ar gear. Allas ! an urz d'o dilivra a oa en em gavet re zivezat.

Soudarded a voe laket er maner. Evel boaz, pa vez soudarded en eun tu bennak, e voe laeret, freuzet, devet. Gwall zistrujet oa maner Keryann war o lere'h.

Jentiled Coatanscour e brenas evit 98.000 lur hag e werzas a dammou. Ar stalig a vije aet da netra hag ar maner distrujet panefe jentiled Forsanz ha Coatgoureden. Hepto gouel bras hanter kantved ar Bleun-Brug a vije bet lidet war eur bern mein goloet a zrez. *Eur palez n'eo ket a re evit enori Feiz ha Breiz ha tad ar Bleun-Brug.*

L. Lok, Renner koz ar B. B.



An Aotrou Perrot a lavar d'eomp penaos ha perak en deus bet savet Bleun-Brug Keryann

Ar Bleun-Brug eo mere'h Kenvreuriez ar Brezoneg, ar gevredigez-se bet savet d'ar 14 a viz C'hovevrer 1894, e Kloerdi Kemper, gant eur brestad, Alfred Laurié evit lakat ar gloareged e tro da anaout gwelloc'h o Breiz. Epad an daou vloaz m'he renis, 1901-1903, e welis ar vad e vije kaout e pep parrez, eur gevredigez savet, war he stumm, hag a vodje ar youankiz, nann da yaou, evel ma rea hi, met da zul. Goulenn a ris, war ar skol-zul, ali an A. Buléon, person Bignan, a oa neuze ar beleg e c'helle ar Vretoned lakât ennañ, ar muia o fizians.

Al lizer a resevis digantañ a zekas d'in kendele'her, gant va labour vreiz-zek... daoust peger kalet bennak e c'hell beza a-wechou an hent, hep fallgaloni, morse; ...eur gentel eo bet hounnez ha n'em eus ket gellet he ankounac'haat goudeze.

Da viz Ebrel 1904, pa voen hanvet da gure e Sant-Nouga, gant an Ao. Cardinal da berson, e klaskis sevel eno, evid ar yaouankiz, ar pezh am boa gwelet e Kloerdi Kemper : eur skol vrezonek.

En em voda a raemp bep sul; studiadennoù ha prezegennoù a veze graet; kaout a ris beleien all hag a rae, en o farrezioù ar pezh a raen em hini ha ganto c'h en em glevjomp da ober raktal goude an eost, gouel ar peurzourn, a lezhanyjomp gouel ar Bleun-Brug, eul lezhano ha n'oa bet roet da c'houel brezonek ebet c'hoaz, daoust ma oa bet rannet bodou brug d'an 29 a viz Gwengolo 1904 en eur gouel savet gant an U.R.B. e Priziac e Bro-Wened, hag hanvet ganti : Gouel ar C'houn.

O kroui ar Bleun-Brug ar pezh a glaskemp oa sklerijenna ar Vretoned war o istor ha war o yez hag o lakât da anaout mat o Breiz evit ma c'helljent he c'haret hag he servieha gwelloc'h goudeze. Ar c'hevredigezioù breizat a welomp o kerzet en dro d'eomp n'oant ket graet, mat a-walc'h, marteze, diouz doare ar bobl : digristen e vezent alies hag o renerien ne ouient ket a vrezoneg.

Evel kevredigez, ar Bleun-Brug a oa krouet da vad, d'ar 7 a viz Meurzh 1905, c'houec'h miz a-raok ma teuas hini eus izili an U.R.B., war he zro, hag ober a eure he c'hresk, goudeze, bep harp all ebet ken nemed an hini a roas d'ezi an Ao. Coatgoureden hag an Ao. Cardinal, mear ha person Sant-Nouga.

An Ao. Coatgoureden a lavare d'in, eun dervez : « Penaos n'eo ket bet deuet, ugent vloaz kentoc'h, p'edon e kreiz va brud, ar c'hiz eus ar gouelioù kaer-se ? »

An Ao. Cardinal o c'hare hag, er brezegenn a rae d'o digeri e lavare, d'ar bobl, an ezomm a oa anezo da rei d'ar spered breizad ar vagadurez a zo diouz e zoare.

Skoazell an daou zen-ze ha n'eo ket hini all ebet eo o deus roet tro d'ar Bleun-Brug da spega, da zével ha d'en am skigna, evel m'o deus graet; war o bezioù, bremañ p'int aet o daou d'ar bed-all, e skrivan an testeni-mañ eus an doujañs hag eus an anaoudegezh vat am eus evito.

(Feiz ha Breiz, 7-1928.)

Y.-V. Perrot.

Ar Bleun-Brug kenta e 1905 e Maner Keryann

Roll ar gouel evel ma edo.

Mardi 12 Septembre 1905.

Grande séance bretonne récréative et littéraire, donnée par les Patres Sant-Nouga, dans la cour d'honneur du Château de Kerjean, gracieusement mise à la disposition des congressistes de l'Union Régionaliste Bretonne, par M. le Comte de Coatgoureden, Maire de Saint-Vougay.

Sous la présidence du Marquis de l'Estourbeillon, Député du Morbihan, Directeur de l'U.R.B.

Les chants seront dirigés par l'abbé Havas.

Le Parc sera ouvert à 1 heure. Un droit de 0 fr. 25 sera perçu à l'entrée.

PROGRAMME

Ouverture : 1. Bro goz : chant national des Bretons, par Jaff. Taldir
2. Allocution de M. l'abbé Cardinal, recteur de St-Vougay.

1^{re} partie :

1. Keltia vo da viken, mélodie bretonne, par Vallée.
2. Distribution de bouquets de bruyère.
3. Kanaouenn ar Bleun-Brug.
4. Job al lounker (premier acte).
5. Maro Job al lounker.
6. Job al lounker (2^e acte).

2^e partie :

1. Netra ne dalv va Breiz, de K. ar Prat.
2. Sav. Breiz-izel, marche des Bretons, de Taldir.
3. Ar Jikolodenn, de M. Quéré.
4. Alanik al Louarn (1^{er} acte).
5. P'edon war bont an Naoned.
6. War-sao, de Jos. Cuillandre.
7. Alanik al Louarn (2^e acte).

Apothéose de la Bretagne au chant de Dalc'h Sonj.

Ferme bretonne dans la cour du château.

E porz ar maner e vo gellet merenna gant krampoez gwiniz, eur gweneg ar pezh, ha sistr eus ar gwella, daou wenneg ar werennad.

KANV

Dont ra d'eomp kelou eus maro hor mignon mat ha kenlabourer aketus an Ao. Bescond, bet person e Kavan en eskopti Sant-Brieg, ha marvet e ti ar veleien goz e Landreger d'an 29 a viz Meurzh.

Erbedi start a reomp ouz hon lennerien ar Breizad kalonek-mañ, hag en deus dalc'het da Vreiz betek e huanadenn ziweza.

Nebeudig arak e varo e kase d'eomp al lizer-mañ :

« Frealzus kenañ ar Bleun-Brug diwezañ. Stag eo ar Vretoned ouz o labour ha digor o yalc'h da sikour. Fred a zo d'an aluzennoù, hag evel ma lavar ar ganaouenn : « Bezañ 'zo bara war ar plankenn »... »

« Gouel Kalleg a laka dudi en hor c'halon. Eur vro gaer, eur vro binvidik ha breton penn-kil-ha-troad, brezoneg flour evel ar zeli ha toupennou ar melchon ruz. »

« HUCHIT MAR PLIJ, HA HUCHIT D'AR VRETONED, PEGEN KRI TAOLER AR BREZONEG E-MAEZ O ZI HA PEGEN ISKIZ TAOLER AR BREZONEG E-MAEZ AN ILIZ. »

« E Kallag, labourit splann-splann evel e Pleuvian. »

« Itron Varia-Vreiz hag an Ao. Doue d'ho skoazia ! »

« Kenavo ar blijadur... »

AR MIGNON.

Da heul e skrive c'hoaz an dra-mañ, evel m'en dije gouezet edo o skriva e bozioù diweza er bed-mañ :

« Hirie, al lun, devez an Anaon. Setu amañ diou bedennig goz kutuilhet diwar eürioù brezonek ar Briz :

« Dilivrit eus ar Purkator

« An holl Anaon, ma Redemptor,

« Ma 'z aint d'ho meuli e repoz

« Ha d'ho kwelout er Baradoz.

« Roit ar repoz eternal,

« Ma Doue, d'an Anaon fidel,

« Ha kasit int d'ar sklerijen

« Evit ho kwelout da viken. »

Aet eo d'ar Baradoz, an hini e oamp boazet da lenn ker alies e Bleun-Brug, din-dan sinadur « AR MIGNON ».

Ar vrec'h hag ar vaksin

gant an Dr. Tricoire

Gwechell-goz, er Grenn-Amzer, e veze paket peb dén, pe dost, gant eur c'hleñved-spegus a vez graet anezañ « ar vrec'h » e Brezoneg; « la variole » e Galleg. D'e heul ez ae eun drederenn eus an dud da anaon. Ma teue ar re all a-benn da barea, e veze pigoset korf an hanter anezo, memes tra, ken e veze dizremmet o fas evit ar peurrest eus o buhez.

Vaksina an dud an hini eo he deus harzet ar c'hleñved-se d'ober e reuz. Kement a zo o paouez c'hoarvezout e Bro-Wened, avat, e ziskouez d'eomp n'eo ket aet kuit an droug-se diwar an douar a-bez, hag e hall beza hadet en dro, n'eus forz pelec'h, pa vez an dud, hizio an deiz, o veaji heb ehan eus an eilpenn d'ar bed d'egile. Pez a ziskouez, ivez, ne oa ket fur dilezel vaksina lod eus an dud. Gouzout a rit kouls ha me penaos eo bet degaset ar vrec'h da Vreiz eus Bro-Indochin tri miz bennak zo, hag ez eus bet betek bremañ tri zen klañv ha tri-ugent, bet marvet, siouaz, eun daouzeg anezo. Sur-mat, oc'h bet advaksinet da heul an darvoud-se.

Plijout a raio d'eoc'h, emichañs, gouzout pelec'h ha penaos eo bet vaksinet an dud da genta.

Ar Chiniz eo hag o deus kroget da vaksina, gwall-bell amzer zo. N'eo ket « vaksina » a raent, lakaat ar vrec'h war an dén, ne lavaran ket. Ober a raent gant lien-brein ar re a oa ganto ar vrec'h heb beza klañv-bras ganti. Dibab a raent, eta, ar brec'hioù dic'hrevus, gant aon da baka ar re c'hrevus.

Er bloaz 1717, gwreg eur c'hannadour eus Bro-Saoz e Bro-Chin a reas d'he mab beza lakaat e-giz-se eur vrec'h zizroug warnañ. Dre ze e teuas an doare-ober-se da veza anavezet e Bro-Saoz. E-kreiz an triwec'h kantvet, dija, e veze e Breiz-Veur meur a vedisin a oa o micher lakaat ar vrec'h war an dud. Jenner a oa unan eus ar re-se. Dre vont da ober e vicher war ar miz, e teskas Jenner digant ar beizanted penaos ne veze ket paket ar vrec'h gant an dud a oa bet klañv gant brec'h ar zaout. (Brec'h an dud ha brec'h ar zaout n'int ket ar memes kleñved. Ar vrec'h, kleñved an dud : « la variole ». Ar vrec'h, kleñved ar zaout : « la picote, la vaccine ». Ar gér « vaksin » a zo diwar al latin : « vaccinus » : bioe'h.)

Brec'h ar zaout, pe vaksin, pe « cow-pox » e Saozneg, a ro d'ar zaout war o bronnou porbolenou (burbuennou) heñvel ouz ar re ho peus bet war ho prec'h, pa'z oc'h bet vaksinet, peogwir e talv ar gér « vaksina » kement ha « lakaat ar vaksin, brec'h ar saout, war eun dén ».

E 1776 eo e krogas Jenner da lakaat war an dud brec'h ar zaout, e lec'h brec'h an dén, da lavaret eo da « vaksina ». Degaset e voe seurt doare-ober d'ar Frañs er bloaz 1800 gant an dug de La Rochefoucault. Hervez giz, Jenner e veze vaksinet, dre lakaat brec'h ar zaout da staga eus an eil dén d'egile. A-wechou, avat, ne veze dén ebet mui da veza kameret ar vaksin diwarnañ. Ouspenn-se, e hallje beza paket ne vern pesurt kleñvet stagus dre ar goad, digant an hini a roe ar vaksin d'ar re all.

Setu ma krogas daou vedisin gall, Lannois ha Chambond o anoioù, da gemer ar vaksin diwar eun ouinner. Da genta e veze kaset ar vrec'h d'ar skol (!), da vaksina ar vugale dre baka porbolennoù an anevel. Bremañ evel a ouzoc'h, e vez lakaat lien-brein ar vrec'h-saout, mesket gant gliserin, e korzennoùgou gwer, siellet, da veza miret en armel-skorna. Gant unan eus ar re-se eo ez oc'h bet vaksinet en deizioù diweza-mañ.

Kontadenn a vro Portugal

TONELL MIGUEL

Bez' e oa eun den a veze gant e bried en eur geriadenn tostik da Vragansa e Tras-Os-Montes. Malonga e oa ano ar geriadenn-se. Ober a raed Miguel anezañ ha Juanita anezi.

Siwaz ! Lonkerez e oa ar vaouez. Sec'h korn e veze bepred toull he gouzoug hag e oa ret heñ disec'heda alies a-hed an deiz. Miguel e oa eun den dereat er c'hontrol. Eva a rae nebeut a dra. Labourat a rae start, ne gomze ket kalz ; eun dén savet mat e oa 'ta.

Bez' o doa eun dachennig douar, enni eur winienn a roe gwin dreist hag e-leiz war ar marc'had. Juanita a dorre he sec'hed diwar ar gwin-mañ. Neket hec'h unan penn, nann. Skoazellet e veze gant eur vignonez ken troet hag hi war an eva.

Sesilia a veze graet eus ar vignonez-se. Nebeut a dra e oa evito lakaat eun donellad da vont da netra e berr amzer.

:::

Skuiz kenañ e veze Miguel pa zistroe diouz ar park rak labourat a rae kalz. Eun abeg e oa evit Juanita da virout ouz he fried da vont d'ar c'hao da gerc'hat an evaj.

« Azezit 'ta, paotr ! Azezit 'ta ! Skuiz-tre oc'h. Mont a ran da gerc'hat eur ban-nao'h gwin hag en em gavot eus ar gwella. »

— « Mont a ran-me, mont a ran ! » — Met e vaouez ne leze ket gantañ tu ebet da vont d'ar c'hao.

Diwezatoc'h e soñjas Miguel e rae fall plega bep tro d'e wreg evelse.

Ober a eure e venoz da vont heñ e-unan d'ar c'hao. Anat e voe dezañ edo, a-benn neuze, gwall izel ar gwin e-barz an donell. En devez-se n'edo ket ar moc'h er ger gant Miguel. Klevout a reas Juanita litanioù treñk a vefe diaes o c'havout en eul levr oferenn bennak :

— « Lonkerez, maouez a netra, ouroullerez hag all... Lonket ac'h eus tout ar gwin. »

— « Nann, Miguel n'em eus ket evet ar gwin ; toull e oa an donell moarvat. »

Fellout a rae da Viguel gouzout ha toull e oa an donell.

— « Nann Miguel, arabat diskenn bremañ : c'houi a zo skuiz ! Warc'hoaz, beure mat ez eoc'h. »

Miguel a yeas da gousket e keit ha ma chome Juanita da skaota an traou. Pa glevas he fried o roc'hat ez eas, mall ganti, da di Sesilia he mignonez.

:::

— « Siwaz Sesilia, tapet oun ! »

— « Petra 'zo 'ta ? Petra 'zo ? »

— O, Sesilia, en abeg n'eus mui gwin e-barz an donell e fell d'am fried va laza. Petra 'vije d'ober ?

— Bezit dinec'h Juanita. Lakaat a raimp ho pried d'en em gavout mat gant ar gwin. »

::::

Antronoz beure mat ez eas Miguel d'ar c'hao ha ne welas toull ebet en donell. Pignat a eure gant ar skalier c'hoant dezañ da skei gant e bried met houmañ a glemiche evel-henn : « Nann, Miguel karet, n'eo ket me eo am eus evet ar gwin-se. »

Miguel a lezas anezi :

— « Hirio da greisteiz e teuot d'ar park da gas d'in va fred », emezañ dezi kouls-koude.

Aet Miguel kuit ez eas Juanita da di Sesilia adarre.

— « Fellout a ra da Viguel va laza, emezi, rak rediet en deus ac'hanoun da vont da gas dezañ e bred d'ar park. »

— Daoust hag hoc'h eus mél, mignonez ? »

— « Ya, bez' em eus. »

— « Mat an traou ! Lazomp eur c'hilhog du hag e welot. »

Laza a rejont ar c'hilhog kaez-se ha mont o diou d'ar park gant ar c'hilhog hag eur sailhad mél. Pignat a rejont war gree'h eun dorgenn a oa park Miguel ouz he zroid.

....

Edo Miguel o labourat en eur c'hortoz e bred. En em ziwiska a reas Sesilia. Lakaat a eure plu ar c'hilhog du warni, peget gant ar mél, ha, war he fenn, aur ouel du hag hir.

— « Kae d'ar gêr diouztu », emezi da Juanita pa voe prest, hag hi da gregi gant an abadenn.

En em lakaat a reas da youc'hal, da zañsal ha goude e hopas gant eur vouez kreñv ha spontus.

— « O Miguel ! Emañ amañ an hini en deus evet gwin da donell ! O Miguel ! Emañ amañ an hini en deus evet gwin da donell ! Ma lakez ar faot war unan all ez i war da benn en ifern. »

Kredi a eure Miguel e oa an diaoul an hini e oa, ha, spont gantañ e lezas e labour ha tout, ha tiz warnañ e tec'has d'ar gêr da c'houlenn pardon digant e wreg.

— « Pardon Juanita ! Pardon Juanita !

Hag e vaouez :

— « A ta paotr ! Petra ' c'hoari ganeoc'h hirio ?

— « Kredi a raen ez oa c'houi eo ho poa evet gwin an donell. . . An Diaoul eo. — Gwelet em eus anezañ ; ha ma ne bardonan ket d'eoc'h e kaso ac'hanoun d'an ifern.

— « A Jezuz-Maria ! Gout a ouien e oa an Diaoul e oa ! Bezit dinec'h Miguel, ez an da gerc'hat eur beleg da venniga hon ti evit argas an diaoul.

Dont a reas ar beleg hag argas a reas an diaoul, mar' doa unan.

Sesilia eo a oa laouen ! — « Ac'hanta ! Ha n'em boa ket lavaret d'eoc'h em bije kompezet an traoù ? »

— Nouze e rejont o zri friko « betek naontek gweneg » evel ma veze lavaret gwechall, gant ar c'hilhog du ; d'in-me avât, n'o deus roet netra.

— Mar d'eo gwir, eo gwir. — Ha mar d'eo gaou taolit va c'hontadenn er sac'h.

Breur Dominik.



E ser c'hoari domino

Ar c'hoari domino a zo koz er vro moarvat ; e Bro Leon ez eur troet kenañ ganti c'hoaz, koz ha yaouank, mere'hed hag all. War zigarez m'eo an dud diwar ar maez eo a blij ar muia d'ezo an dominoiou, e lavarêr buan awale'h eo ar c'hoari domino eur c'hoari evit tud dizesk ha netra ken, tud diwarlerc'h.

Koulskoude ma n'eo ket ret beza bachelour evit c'hoari domino, e ranker anzav n'eo ket kenta genaoueg e gaver a zo gouest da c'hoari mat an dominoiou. Ret eo teurel evez, dere'hel soñj gant piou ha penaos eo bet pozet pep pion, war betra eo bet boudet pep hini eus ar c'hoarierien ; ret eo kaout spi ha finesa evit gwaska an enebourien, o lakaat da zigas ar pionou emañ o c'hortoz pe emañ ar c'hamalad o klask kaout... Ha me oar me ! N'eus ket nemeur a c'hoariou hag a vefe ken plijadurus hag an dominoiou pa vezer deuet da veza ampart hag aroutet ha p'en em gaver pevar ha n'eo ket pikouzet o daoulagad na gwiad-kevidennet o spered. Arabat eo beza souezet ha goude ma vefe kalz tud hag a zo tik gant an dominoiou ; n'eo ket dibaot klevet e vefe padet ar c'hoari domino betek ar mintin adreuz an noz.

M'oc'h eus c'hoant ouspenn deski ar brezoneg ha klevet « paribolennou », it da c'hoari domino pe da zellet c'hoari.

Setu en em gavet pevar ganfard en ostaliri goude ar gousperou ha dominoiou war an daol.

Tenna pionou da genta, an daou izela ouz an daou uhela. Azeza a reont e kroaz : Cheb ha Laou, Hervé ha Lan. Penaos e vo kont ? Pakomp ar beder genta da c'hounit pe c'hoaz — plijadurusoc'h marteze dreist-holl pa vezer c'houec'h o c'hoari — an deir war eeün da zastum an taol ha mouilh bep taol ar re a zeu er c'hoari. Ar par c'houec'h a bozo bep taol pe ma kirit ar par c'houec'h da zigeri an abadenn ha goude-ze diouz tro. Bremañ eo divizet mat pep tra, ne vo ket kel a zinkan.

Ha krog ar c'hoari ! A bep seurt a glever :

Gant piou emañ ar par c'houec'h ?

Da biou eo da vont ?

C'houec'h partout ; an neb n'en deus ket a zo boud.

Ar re vras er maez, gant aon na ve stanket.

Pemp eo, digor d'ar par.

Gwerzet, eme Herve, o lakaat e bar pemp.

C'houec'h adarre, jeu ar poz.

Kavet oun, eme Jeh, boud oun... unan all en deus !

Gwenn e benn.

Pempoul e kreiz an aod.

Diou eme ar c'haz.

Bide c'hoaz, gwelet e vo betek pelec'h ez aint.

Teil n'eo ket kolo eo.

Ar Stankerez pe ar rederez.



Dre douez e kaver tro da zistaga paribolennou berr, setu unan bennak klevet ganin :

— « Gwelloc'h eo beza mevel e ti eur gwerzer douar eget e ti eur prenor. »

— « Me 'zo hardisoc'h amañ eget er gêr ! » — « Perak 'ta ? » — « Perak ? aes eo da gredi, ma vezan kaset kuit ac'hanen e c'houzon da belec'h mont, e-lec'h ma vefen kaset kuit eus ar gêr e vefen lakaet nec'het o klask gouzout da belec'h mont. »

— « N'eo ket awale'h lakaat viou en neiz, o lakaat da zifoupi a zo eur c'hoari all. » (N'eo ket awale'h staga gant eul labour, e gas da benn eo !)

— « Sammet ? soñj an eus e oa bet pariadeg eun devez da welet piou a zammfe ar zae'had pounera. Fanch ar portezet a oa eur gwall baotr da zamma ha koulskoude e kavas e vestr : kant lur, daou c'hant lur a yeas gantañ. « Laka daou c'hant hanter, eme Bêr. » Pa voe karget ar zae'h, Pêr a c'haolias ar zae'h hag a azezas warnañ. Setu, emezañ, sammet eo ganin ! »

— « Pa zav ar c'herc'h d'e grin e teu friant ar marc'h » (pa deuer da veza pinvidik e teuer da veza otusoc'h).

— « O ! O ! n'emañ ket an toullou hag ar bontonou er memes tu kement-se ! » (N'emañ ket pep rezon ganez.)

— « Bep a vanne bras ? nann laka banneou krenn d'comp, arabat eo ober brizerez. »

— « Boud ? Setu unan o vlejal dija ! »

— « Ya, ya ! Boud ! An treñ bihan ne dremen mui dre amañ, ha boud er memes-tra ! »



Ha kant tra evelse, furnez ha spered ar goiz o trenien eus eur rummad d'unan all. Mont da c'hoari domino pe da zelaou konta marvailhou e korn an oaled epad nozveziou hir ar goañv setu eun doare da zeski brezonek saourus.

V. F.

KORN AL LIZIRI

Kastell-Brient, d'ar bemp a viz Meurzh 1955.

Aotrou ker,

Laouen oun p'ho peus kavet mat va fennad diwar-benn ar « vrec'h ». A dra-sur ho pije bet hennez teir sizun abretoc'h ma vijen bet sur en dije plijet d'eoc'h. Pez a laka ac'hanon da soñjal ne helloc'h ket reseñ kalz pennadou digant an dud gouest d'o sevel, keit ha ma vo lezet pep tra d'o « bolontez vad ». Ret e vefe ranna al labour on eun doare resiz... Kement-se am c'has da lavaret d'eoc'h va mennoziou diwar-benn an tu da rei muioc'h a lañs d'ho kelaouenn.

Da genta e tleer sellet ouz stad ar brezoneg evel m'emañ.

An dud vras ha n'int ket douget dija da lenn o yez c'henidig ne glaskint ket he lenn drezo o-unan. Ne heller ket, eta, mont **WAR-EEUN** d'ezo.

Peogwir eo bet digoret dor **AR SKOLIOU** d'ar brezoneg, e heller, dre an hent-se, mont d'ar familhou. Ret e vo, eta, klask koumananti lod eus ar vugale a ra war dro ar brezoneg er skol. Bez' e heller, sur a-walc'h, koumananti anezo, dre rummadou diouz ret. (5 pe 10 bugel evit eun niverenn.)

Kement-se a ziskouez e vo ret kaout gelaouenn traou evit ar vugale, met ivez traou hag a hello plijout d'o zud pa zigasint anezi d'ar gêr. Rak, o welet o bugale o lenn brezoneg, e klasko alies ar gerent lenn asambles ganto.

Kement-se a ziskouez ivez e vo ret ober gant **DOARE-SKRIVA AR SKOLIOU**, hag ober, evit lod eus ar pennadou, gant eur brezoneg ês da gompren. Ober war-dro **KUDENNOU AN AMZER VREMAN** a ranker dreist-holl, ivez.

Setu penaos e kav d'in e halfe beza rannet ar gelaouenn :

1° Eur pennad (1 baj.) diwar-benn ar feiz kristen (gant eur beleg).

2° Pennadou all uhel a-walc'h (skiantou displeget d'ar bobl ; feiz ha gouiziegezh ; medisinerzh ; barzoniezh, etc...) (2 bajenn bennak).

3° Pennadou diwar-benn Breiz (kudennou bras ar gounidigezh douar, ar peskerezh, an divroa- etc...) (2 bajenn bennak).

4° E-kreiz ar gelaouenn, traou ar **Bleun-Brug** hag an traou o sellet ouz ar brezoneg, ar folklore, an arz... (pennadou ha keleier). Ar feiz e Breiz (buhez ar **Bleun-Brug**, ar c'helc'hiou keltiek, ar sportou breizek, etc...).

5° Pennadou a bep seurt. Traou fentus. Istorioùigou evit ar vugale (4 bajenn bennak).

6° C'hoariou-spered. En o mesk, goulennou diwar-benn traou breizek (tud veur, istor, douaroniezh, gizioù, etc...) da veza kavet o respont gant al lenner, an diskleradennoù o veza roet en niverenn da zont.

EUR C'HENSTRIVADEG bep bloaz. (2 bajenn bennak evit kement-se.)

7° Liziri al lennerien. Goulennou ha responchoù d'al lennerien. Pennad eun den yaouank (kavout a ra d'in e vefe dreist embann bep gwech eur pennadig bet savet gant **EUR C'HRENNARD**, ha rei **EUR PRIZ**, e fin ar bloaz d'ar pennad gwella : e-giz-se e vefe kavet kenlabourerien evit an amzer da zont. Ar priz-se a halfe beza : kaout boued ha lojeiz vit netra e skol-hañv ar **Bleun-Brug** ; **RAK SPI AM EUS E VO SAVET EUR SKOL-HANV GANEOC'H**, evel ho peus lavaret e niverenn diweza ho kelaouenn).

A zo kaer ! Ha kavout tud d'ober kemend-all ? — Kroui degaserien-geleier e-touez renerien ar c'helc'hiou keltiek, ar bodadegoù sportou breizek hag all.

Da geñver peb **Bleun-Brug** bras, sevel eur **VODADEG**, o pedi da vont di an holl re gouest da sevel ha pa vefe nemet eur pennad beb bloaz diwar-benn an traou o klota gant o spered hag o micher, ha **RANNA AL LABOUR** etrezo, en eun doare resis, evit ar bloaz da zont, goude beza divizet da c'houzout peseurt danvez lakaat er gelaouenn.

Soñjou **UNAN** eus lennerien ho kelaouenn eo kement-mañ, ha netra kén.

Doktor Tricoire.

Setu eur roll labour renket eus ar c'haera. Bennoz Doue a lavaromp a greiz kalon d'an D^r Tricoire, ha goulenn a reomp skoazell hon lennerien evit d'eomp da c'hellout seveni ar mennoziou-mañ.

Kalz plijadur em bevez bep miz o lenn skridoù ar « **Bleun-Brug** ». Kalz a draou kaer a vez e-barz, hag a ya doun er spered hag er galoun...

Koulskoude em eus c'hoant da rebech d'ezañ eun dra : brezoneg re uhel, re « savant » a vez a-wechou e-barz. Brezoneg hag a blij d'an dud gwiziek, sur a-walc'h, mez d'ar bobl ? d'ar baizanted ?... Ar re-mañ n'o deus ket an « dictionnaire » (me n'em eus ket ive, siouaz !)... Ha setu perak, a zont d'in, e ve gwelloc'h implija gerioù simpl ha freaz, eaz da lenn ha da gompren... Traou serius, a-dra-zur, mez ive traou fentus ha plijadurus. An dud a gar c'hoarzin. (Ainsi, les articles de Corentin dans La Croix, de Dubat, dans Le Pèlerin, plaisent au peuple parce qu'ils font rire tout en cachant une vérité.) Ar re-ze a zo daou « lapin » hag a anavez kalon an den. Evit ober eun tammig vad d'an dud e ranker o c'hemeret e-geiz m'emaint. Ne ket gwir ? — Amañ e skol I.V.L. ez a mat ar brezoneg en-dro. Mez, tenn eo al labour. Ar galleg fall en deus lazlet ar brezoneg mat. — Selaouit ar frazenn-mañ klevet en eun tu bennak e-kostez L. :

« Maman ? — Quoi qu'y a mon fesse ? — Moi je trouve pas bon le semoul ! — Tampire pour toi ! Mangez sort qu'y a à manger, ou tu seras envoyé dormir sans rien du tout avec un feskennad sur le marché ! Compris tu as ? spèce de beg-figus ? »

Ha penaos konvertisa ar gerent sod a-walc'h da frigasa eul « langaj » evel-se ? T'ad hag a ar brezoneg kaer !... Goulenn a ran digant Doue ma 'z ay ar brezoneg alao war gresk ha war-a-raok.

EUR SKOLAEREZ.

KELEIER

Devez Studi Douarnenez.

Seizvet devez studi ar **Bleun-Brug** a zo bet graet e Douarnenez d'ar 27 a viz Meurzh.

Renket e oa bet kaer an traou gant ar c'helc'h, en e benn an D^r Philippe ha Jos. Larvor.

Oferenn da zek eur e chapel Santez Helena, bet ken aliès all darempredet ha santelaet gant an Tad Mikael an Nobletz. An Ao. Chaloni Rannou, person Douarnenez, a ouezas ken brao ha tra digas d'eomp da soñj eus kement-se.

Kantikou ha lennadegoù brezonek penn-da-benn an oferenn, dirag eur chapeliad re yaouank. Unan koz bennak a oa deuet ive, hag a rede an dour en o daoulagad o klevout kemend-all.

An Ao. J.-Y., ar Mough, kelennner e skolaj St-Youen, e Kemper, eo a brezegas. Brezoneg flour Bro-Gerne a strinke dudioù diwar e vuzelloù pa denne evidomp, eus mojenn Ker-Iz, kentelioù nevez evit an amzer vremañ.

Goude an oferenn e sal gaer ar patronaj re vihan evit niver an dud, an Ao. Chaloni Batany a gomzas d'eomp eus « Marvailh burzudus Ker-Iz ar gêr Villiget ». Eur marvailh eo hemañ, emezañ hag a zo koz. evel ar bed. Keriou konfontet a zo bet dre holl, deuet da veza burzudus e memor an dud. N'eus bet Ker-Iz ebet eta ? Ne oa ket, a dra-zur, ken bras na ken kaer ha ma lavar ar werz. Chom a ra ar gudenn da ziskoulma pa n'eo ket bet c'hoaz gweladenet piz a-walc'h gouezet ar pleg-mor.

Prezegenn an Ao. Batany, e studiadenne kentoc'h, a dlefe beza moulet war he hed. Bez' ez eo frouez eul labour dispar savet diwar 77 skrid disheñvel.

Warlerc'h ar brezegenn e voe laouen bras ar pred kemeret asamblez dirak ar mor.

Goude ar pred, Georges Merdy, dirak Enez-Tristan, a daolennas dirazomp istor an enezenn-mañ, bet anvet da genta Enez-Tituarn, pe kentoc'h Tituarn-Enez, ano ar manac'h koz a oa enni o chom er 6^{vet} kantved.

Gant an D^r Philippe, an holl a reas goudeze eun droidad d'ar porz-nevez. Ar baotred a c'hellas zoken diskenn war eur vag-vras-pesketa.

Evit echui, eur verenn-vihan, kinniget gant ar c'helc'h a vodas an holl adarre er patronaj. Eno, Georges Merdy a reas eun tammig skol d'ar re yaouank war an doare d'ober c'hoariva pe da zisplega peziou-c'hoari : eur gentel blijus hag eus ar re wella hag a reas plijadur d'an holl.

Devez-studi Douarnenez a vo an diweza araok ar Bleun-Brug bras. An hini niverusa eo bet ha frealzus bras eo echui war eun taol ken kaer. Kenavo er goañv a zeu.

Devez Studi Plistin.

D'ar 27 a viz Meurzh ec'h en em vode e Plistin evit eun devez Studi, kele'hioù Bro-Dreger ha Goelo, dindan renadur an Ao. Kadoudal hag an Dimezell Fournis.

Eur 80 bennak a re yaouank a en em gavas eno a-benn an oferenn-bred, kanet gant an Ao. Person ha prezeget e brezoneg gant an Ao. Bourdellès, kelenner e Lannuon. Diskouez a reas ar c'holl mantrus a zo, o lezel da vont da get herez hon Tadou. Re yaouank ar c'helc'hioù ha bagadou a zo ret d'ezo stourm evit miroùt ouz an droug-se.

An D^r Philippe eus bureo ar Bleun-Brug a reas goude eur gaozeadenn war ar « mixité » er c'helc'hioù. Studiet piz eo amañ, ar gudenn-se, war he zu mat hag he zu fall. Rei a ra an D^r Philippe kentelioù fur, evit ma vo ar mad trec'h atao d'ar fall. (Roneoskrivet eo bet ar brezegenn-mañ. Bez' e c'heller he goulenn diganeomp : Bleun-Brug, Châteaulin, Fin.)

Goude ar pred, hag eur gwin a enor evit lavarout kenavo da Bolig Montjarret, o vont diouzomp evit 20 miz, eur bourmenadenn hor c'hasas betek al Leo-Drêz, ha chapel Sant Eflamm. An Ao. Bourdellès a roas d'eomp da glevet istor an daou lec'h-se.

Eur verenn-vihan a vodas eur wech c'hoaz ar re yaouank. Polig a lavaras d'ezo eur ger sonn, hor Mignon al Louz a roas aliou evit devez ar brezoneg, Visant Seite divarbenn ar Bleun-Brug. Fin vat a voe d'an abadenn goude eur ger c'houek a-berz an Ao. Kadoudal ha kan « Ar Vro goz ».

Eun dro e Pari (7-20 a viz Meurzh).

Sekretour ar Bleun-Brug a zo bet 15 devez e Pariz. Eun digemer eus ar gwella a zo bet graet d'ezañ dre holl. Laouen eo da drugarekaat amañ pep hini, dreist-holl Herri Caouissin hag e bried hag o deus bet ar vadelez d'e zigemer en o zi e-doug ar 15 devez-se. En o zi eo en em gavet evel gwechall e ti an Aotrou Perrot e unan. — Studia en deus gallet evel-se, oberou Tad ar Bleun-Brug.

Eur brezegenn a reas ivez e Kervreiz, da vignoned ar Bleun-Brug, a deuas niverus d'e selaou. Bennoz Doue d'ezo ha d'an Ao. Laurent, rener Kervreiz.

Ar veleien hag ar brezoneg.

« Kenyveuriez ar brezoneg » he doa pedet beleien eskopti Kemper d'en em voda e skolaj Sant-Loeiz e Kastellin, evit studia kenetrezo kudennou an amzer vremañ e sell ouz Breiz.

43 beleg o deus respontet d'ar galv. Dek all ouspenn o doa roet o ano, met n'helljont ket dont.

Da 10 h., an Ao. Chaloni Favé a roas da anaout kement tra a-sell ouz an emzao breizek a vremañ : strolladou ha kelaouennou. Komz a reas eus ar Bleun-Brug, ar B.A.S. ar c'helc'hioù, an emzao lennegel en-dro d'al Liamm...

An Ao. Chaloni Kerautret, rener oberou kristen an eskopti a ziskouezas an darempred a c'hell beza etre yaouankizou ar c'helc'hioù, ar bagadou sonerien, ar Bleun-Brug ha yaouankizou an oberou katolik. Pep rummad a c'hell pinvidikaat egile. An eil sklerijenna egile hag en em harpa evit gwella mad ar vro hag ar feiz.

Goude merenn, an Ao. Chaloni Falc'hun kelenner e Skol-Veur Roazon a zisplegas d'eomp istor ar gelennadurez e Breiz abaoe an Dispac'h. Poueza a reas war ar fazi bet graet gant ar gelennadurez-se o lezel ar brezoneg a gostez. Pal an « Unesco » hirio eo miret ha ve graet c'hoaz seurt faziou. Ret eo da bep hini kompren n'en deus ar Breizad nemet gounit da ober o teski e yez da heul ar yezou all.

Kan ha Diskan.

Eun eil devez Kan ha diskan a zo bet e Spezet d'ar 6 a viz Meurzh. Daoust ma oa fall an amzer, ez eus bet e-leiz a dud. Kanerien wella ar vro a zo bet klevet. An hent digoret gant Kele'h Poullaouen a ziskouez beza mat. Ra vo kendalc'het gantañ.

Klevit 'ta !

D'ar 15 a viz Mae

Bleun-Brug eskopti Sant-Brieg e Kallag

Eus 8 h. 30 da 11 h. : **Kenstrivadegou** ar Bleun-Brug, Lenn, displega, kana, prezeg, konta.

Da 11 h. : **Oferenn-bred** prezeget gant an ao. Du, person Plougernevez.

Da 14 h. : **Koroll ha kan.**

C'hoariva : **An Dour e buhez Breiz.**

Da 18 h. : Prosesion ha bennoz ar Sakramant.

Eur mor a gan e vo Kallag

d'ar 15 a viz Mae.

Pep Breizad a vo e Bleun-Brug Kallag.

Madoberourien ar Bleun-Brug

1. — Evit sikour paea eil sekretour ar B. B.

An Ao. Gab ar Moal, Naoned : 5.000 lur ar miz. An Ao. Yann ar Minor, Pont'n-Abad : 5.000 lur ar miz. An Ao. Falc'hun, Roazon : 2.500 lur bep miz. An Itron a Rohan Chabot : 10.000 lur bep miz. Yann Goas : 2.000 lur bep miz. An Ao. chaloni Favé : 10.000 lur (kenta donezon). Komite B. B. Bro-Dreger : 20.000 lur.

2. — Evit sikour renka Roz-Bleuniou, ti ar Bleun-Brug.

D^r Delaporte, Kastel-Nevez : 3.000 lur. — Dizano : 1.000 lur. — Joséphine Jacob, Rozko : 1.000 l. — Baron Pichon Longueville, Paris : 1.500 l. — Itron V. de Pierre, St-Brieg : 1.000 l. — D^{ne} Martin, Brest : 1.500 l. — Ao. Giemb'e, Brest : 500 l. — Ao. Bonvalet, Angers : 500 l. — Ao. Alain, Versailles : 500 l. — *Le Courrier du Léon et Progrès de Cornouaille* : 10.000 l. An Ao. de Guebriant, Kastell-Pnol : 8.000 l. — Ao. F. Ters, St-Cloud : 1.000 l. — D^r Laurent, Toulon : 2.000 l. — Ao. Job Loyant, Naoned : 1.000 l. — Ao. Corre, Lesneven : 1.000 l. — Ao. Dyèvre, Paris, 200 l. — Ao. Mear, person Plouvorn : 2.000 l. — Ao. Quéau, Vieilleveigne : 500 l. — D^r Vouc'h, Plouidiern : 1.000 l. — Ao. Henri, Lennon : 1.000 l. — Ao. Renaud, Paris : 2.000 l. — Ao. Floch, Dinan : 1.000 l. — Ao. Chapelier, Paris : 1.000 l. — M. R. Lescène, Paris : 500 l. — Ao. Daniel, Naoned : 500 l. — Chaloni Montfort, St-Yann-ar-Biz : 5.000 l. — Ao. Souffès, Guipavas : 2.000 l. — Ao. Abguillem, person Trelez : 500 l. — Ao. Cousquer, Landerne : 1.000 l. — Itron Vienot, Kastellin : 1.500 l. — Ao. L'Haridon, Kastellin : 1.000 l. — Ao. Guerneur, beelg, Montroulez : 500 l. — Ao. Le Nir, Kastellin : 2.000 l. — Dizano, Kemper : 1.000 l. — Ao. Hénaff, Pouldreuzic : 1.000 l. — Ao. Mocaer, Kemper : 5.000 l. — Itron Aubry, Roazon : 1.000 l. — Ao. Loisel, Versailles : 300 l. — Ao. Jaouen, St-Marc : 1.000 l. — Ao. Le Goff, Kemper : 500 l. — Chaloni Grill, Kemper : 1.000 l. — Ao. Le Lann, an Orlant : 1.000 l. — D^r Kervran, Pariz : 1.000 l. hag eur groaz koz a dalvoudegez vras. — Ao. Colleau, beleg, Plozevan : 1.000 l. — Ao. Hamelin, Fougères : 500 l. — An D^{ne} A. Gervengy, Sibiril : 1.000 l. — Ao. Toulemon, Pont'n-Abad : 1.000 l. — Ao. Erwan Mocaer, Paris : 2.000 l. — An D^{ne} Françoise Thevenet, Landreger : eur greg gant filtr ha 6 kastelodenn. Eun tommer dre c'haz, gant dizano, Dlou Inser, eur c'holoenn-daol, eur c'holoenn-we'e, torchouerou, gant an Ao. Gab ar Moal. — Ao. Le Perre, an Oriant : 800 l. — Ao. Le Meur, Kastellin : 500 l. — Ao. L. Bothorel, Paris : 1.000 l. — Eur c'helc'hed prestat gant Jos Doare, Kastellin. — Ar pezh a ra en arc'hant : 78.300 lur.

Dispignet hon eus evit renka Roz-Bleuniou : 74.308 lur. Chom a ra c'hoaz da baea notenn an « electrisian » hag an hini en deus laket an dour en ti. (Wardro 100.000 lur.)

Bennoz Doue d'hor madoberourien. Ra vo re all oc'h ober eveldo.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.F.P.P. N° 21697





Laz-Kana Landivisio. — Klevet e vo adarre e Bleun-Brug 1955.
ha gant o skoazell e vo ar Bleun-Brug-mañ ar c'haera hini bet gwelet beteg henn.
Ra vo an holl Vretoned e Bleun-Brug Landi d'an 30-31 a viz Gouere a zeu.